

Pour la Veillée de Plouaret

DRIDRI-MOR

Me zo ganet e Breiz-Izel
'N eun ti koz bihan ha brao
Harpet start ouz troad eur roc'hell
En disheol ar pin hag ar skao.
Ar mor en deus peb tra dismantret,
Beuzet va mann, lazhet ma c'hoar.
Daerou kriz me am eus skuilhet
En disheol mein braz ar c'halvar !

Hag ar mor bepred henn karan
Pa vez sioul evel pa groz.
Me a blij din selled outan
En disheol lanneier ar roz.
War an tevenn me am eus kavet
An hini a garis kerkent :
He c'halon he deus din roet
En disheol eur garreg divent.

Daoulagad glaz merc'hig ar mor
A zo tener ha lirin.
Pa ven skuiz, pegen kaer goudor
En disheol he bleo liou bezin !
D'ar mor ni a zo gwir vugale ;
Ni vo kavet eun deiz bennag
Beuzet an eil hag egile,
En disheol relegou hor bag !

Evnick Penn ar C'hoad

ETOURNEAUX DE MER

Je suis né en Basse Bretagne
Dans une vieille maison, petite et jolie
Appuyée au pied d'un rocher
A l'ombre du pin et du sureau.
La mer a tout détruit,
Noyé ma mère, tué ma sœur.
J'ai versé des larmes cruelles
A l'ombre du socle du calvaire.

Et la mer toujours je l'aime
Qu'elle soit calme ou qu'elle gronde.
J'aime à la contempler
A l'ombre des ajoncs du tertre.
Sur la falaise j'ai rencontré
Celle que j'aimai aussitôt :
Son cœur elle m'a donné
A l'ombre d'un rocher immense.

Les yeux bleus de la fille de la mer
Sont tendres et joyeux
Quand je suis las, quel beau refuge
A l'ombre de ses cheveux couleur de
Vrais enfants de la mer, [goémon
On nous trouvera un jour
Noyés, l'un et l'autre,
A l'ombre des restes de notre barque !

Eugène LE ROUX

Commun. Republ.

9/11/51